

**Golvannic** (Oliero Lokmariaker 1856 – Sanrez Anna Wened 1930)

Beleg.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Bet savet e gwenedeg.

## **Perag e kanan-me**

*War don* : Merlin (Barzaz Breiz)

I

Deit e' en neùé-hañv indro  
Ged e vrageriseu d'er vro ;  
Mèz n'en de' ket é vraùité  
E lak ém halon leùéné.

2

Digor é miz er bokèteu,  
Ema er bod spern-gwenn é bleu ;  
Mès n'en de' ket é vleu gwenn é  
E lak ém halon leùéné.

3

Ker sklinton é tiñs er hlehér  
Ma tassion, én aod, er grehér ;  
Mèz n'en de' ket o boéh vraù e'  
E lak ém halon leùéné.

4

Er hoed braz en eined a gan  
Kanaouenneu kaer keti-ketañ ;  
Mès n'en de' ket o han kaer e'  
E lak ém halon leùéné.

5

Neoah me halon 'zo bleuet,  
Bleuètoh eid bleu er boked ;  
Me halonig neoah e gan  
Gwiùoh eid en estig d'en hañv.

6

Me halonig beur 'lar dein-mé,  
'Lar dein péra e kanez-te,  
Perag é kanez-te hiniù,  
Ker braù, ker flourig ha ker gwiù.

7

Te houlenn perag e kanan  
Gwiùoh eid en estig d'en hañv.  
Perag e kanan-mé hiniù  
Ker braù, ker flourig ha ker gwiù.

8

En neb 'zo karet hag e gar  
'Zo en ur baraouiz àr zouar ;  
Me 'zo karet, karein e hrann  
Ha chetu perag e kanan.

# En hani e garan

*War don* Le recteur exilé ; Barzaz Breiz.

N'en deus ket gwerso braz, é toned a bell bro,  
E-tal er fetan, én ur hoedig distro,  
Me ' gleùas ur voueh vraù, ur voueh velkoniuz  
E kanein ur ganenn, ur ganenn druhéuz.

Me gleùas ur plahig e kanein hirvouduz  
Kanennig he halon, ur han karantezuz,  
Hag, àr ur bod freskon, einig en Eutru Doué  
D'er plahig hlaharet d'e dro e tiskane.

En hani e garan e hra dein huanadein,  
Huanadein noz ha de', de' ha noz hirvouduz ;  
Rg-az choñjet em-eus, eid dizammein m'inéan,  
Seùel ur sonennig d'en hani e garan.

En hani e garan n'en-deus den àr en douar,  
N'en-deus na tad na mamm, n'en-deus na kar na par ;  
Kollet en-deus e dud ag en oed tenerrañ,  
Ur hêh inevad<sup>1</sup> é en hani e garan.

En hani e garan 'zo dreist en oll baotred,  
N'en-deus hani hañval 'med ma véhé êled ;  
'Med ma véhé êled en Eutru Doué, en neañv,  
N'en-deus hani hañval d'en hani e garan.

En hani e garan en-deus deu zornig gwenn,  
Bleù melen el en eur<sup>2</sup> distennet penn-der-benn ;  
Braù ée boeh en estig, ér hoédig glaz pe gan,  
Mez gwell é' genein boéh en hani e garan.

En hani e garan en-deus deulagad luemm<sup>3</sup>,  
Pe daol àrnein ur sell, me halonig e duemm<sup>4</sup> ;  
Flour e hoarh goleu-dé', pe saù d'en neùé'-hañv,  
Mez flourroh é minhoarh en hani e garan.

En hani e garan gweharal em haré,  
Kas e hré pe ganen, pe ouilen é ouilé ;  
E galon ha m'hani nameid unan,  
Pe oé bihan ér gêr en hani e garan.

En hani e garan bremañ 'deus me laosket,  
Oeit é d'er broieù pell, d'ur vro n'anaùan ket,

---

<sup>1</sup> inevad : emzivad.

<sup>2</sup> eur : aour.

<sup>3</sup> luemm : lemm.

<sup>4</sup> me halonig e duemm : ma halonig a domma.

Oeit é' d'er broiou pell de hounid tud d'en neañv,  
Kollet, kollet é' dein en hani e garan.

D'en hani e garan ne hran 'meid hirvoudein.  
Penaoz ker pell dohton é hellein-me biùein ?  
Mez petra 'laran-mé ? Turlubannerein<sup>5</sup> e hran,  
Dré hir choñjal ataù én hani e garan.

D'en hani e garan, mar kollan-mé me fenn,  
Einedigeu, ér hoed, kanet-c'hwi ho kanenn ;  
Eined, kanet er hoéd, kanet keti-ketañ :  
Karanté', karanté' d'en hani e garan.

D'en hani e garan é kanan kenavo,  
Kenavo aveid mad, betag ma yein d'on bro,  
Betag ma yein d'on bro, de ranteléh<sup>6</sup> en neañv ;  
Eno 'vo e kavein en hani e garan.

D'en hani e garan ne hran 'meid huanadein,  
Huanadein noz ha dé', dé' ha noz hirvoudein ;  
Rag-se em-eus saùet ha rag-se é kanan  
Kanennig me halon d'en hani e garan.

---

<sup>5</sup> Turlubannerein : mond e berlobi.

<sup>6</sup> ranteléh : rouantelez.